

AR VEAJ-TAÑVA

Rio ha Roxy zo ur c'houblad bleizi o chom en Italia.

Un noz e lavar Rio :

- Selaou 'ta, Roxy ! Skuizh on o chaseal lapined hag o tebriñ pizza. Ha ma klaskfemp debriñ traoù all evit cheñch !

- Akord on ganit. Deomp neuze.

Ha setu penaos eo komañset beaj vras ar bleizi.

War-zu ar gwalarn ez eont da gentañ. En ur dreuziñ an Alpoù e chomont a-sav e-barzh ur preti. Servijet e vez dezho un tartiflette met dipitet-tre int peogwir eo divlaz.

Da c'houde e treuzont menezioù an Auvergne e lec'h ma vez servijet dezho un truffade hag a gavont re spegus.

An deiz war-lerc'h, diouzh ar mintin, e tañvaont ur vriochenn eus ar Vande :

- Ha neuze, Rio, mat e kavez da vriochenn ?

- Ket ! Re sec'h eo.

- Ya, ha fastus eo ouzhpenn.

- Ale ! Kendalc'homp gant hon hent neuze !

Goude ur veaj hir ec'h erruont e Landerne, war pont ar Rohan, hag ez eont evit ar wech kentañ en o buhez, e-barzh un ti-krampouezh.

Ar servijour, spontet da gentañ o welet 2 vleiz en e breti, a c'houlenn diganto memestra :

- Petra ho po ?

- Ho krampouezhenn ispisial, mar-plij !

Un nebeud munutennoù war-lerc'h ec'h en em gav an ostiz gant ur grampouezhenn domm, enni un anduilhenn eus a C'hemene, sivi eus a Blougastell, kaol-fleur eus a Rosko ha karamel amann sall eus a Werrann.

Pa zebront ne c'hell ket Rio ha Roxy miret da vousec'hoarzhin, kalz a stered en o daoulagad.

Ur gwir LIP E BAV eo !

Setu penaos eo en em gavet ar bleizi e Breizh, goude ur veaj hir, ha penaos, goude bezañ tañvaet ar pred gwellañ o doa debret a-viskoaz, o deus divizet da chom eno da viken.

Ar c'hlasad 6B/C / Skolaj Meskoad



LE VOYAGE CULINAIRE

Rio et Roxy est un couple de loups qui vit en Italie.

Un soir, Rio dit :

- Ecoute donc, Roxy ! J'en ai marre de chasser des lapins et de manger des pizzas. Et si on essayait d'autres choses, pour changer !

- Je suis d'accord avec toi. Allons-y donc.

Ils partent tout d'abord vers le nord-ouest. En traversant les Alpes ils s'arrêtent dans un restaurant. On leur sert une tartiflette mais ils sont très déçus car elle est insipide.

Il traversent ensuite les monts d'Auvergne où on leur sert une truffade qu'ils trouvent trop collante.

Le lendemain matin, ils goûtent une brioche vendéenne :

- Alors, Rio, ça te plaît, la brioche ?

- Non, c'est trop sec !

- Oui et en plus, c'est écoeurant.

- Allez ! Continuons donc notre voyage !

Après un long voyage, ils arrivent à Landerneau, sur le pont de Rohan, où il se rendent pour la première fois de leur vie, dans une crêperie.

Le serveur, effrayé, dans un premier temps, de voir 2 loups dans son restaurant, finit par leur demander :

- Que désirez-vous ?

- Votre crêpe spéciale, s'il vous plaît !

Quelques minutes plus tard, le barman arrive avec une crêpe chaude à l'andouille de Guéméné, aux fraises de Plougastel, au chou-fleur de Roscoff et au caramel au beurre salé de Guérande.

En mangeant, Rio et Roxy ne peuvent s'empêcher de sourire, les yeux remplis d'étoiles.

C'est un pur DELICE !

Voilà comment les loups sont arrivés en Bretagne, après un long voyage et comment, après avoir goûté le meilleur plat qu'ils aient jamais mangé, ils ont décidé de rester y vivre pour toujours.

La classe de 6B/C / Collège de Mescoat

